

Ton : Pa zaoulinomp erit korez.

1

Kalz tud, siouaz! a vez dalc'het
E skilfou lemm an Droug-Spered,
Ped den a gav daonasion
Oc'h ober gwall gonfesio?

2

Setu eur skuer skrijus meurhed,
Zo bet enn Indez c'hoarvezet:
Tud koz ha yaouank klevit-han,
Ha dalc'hit sonj mad anezhan.

3

Eur plac'h yaouank hanvet Katell,
Matez (plac'h) e ti eun dimezel
'Vit gellout beva en e roll,
A lez Doue, a deu diroll.

4

N'en doa ket ouspen pemzek vloaz
D'ar fall gant tiz p'en em daolas;
E yaouankiz a ro d'ar bed,
D'an droug, d'an dans, d'an droug-
[Spered.

5

Bep sul ha bep gouel, ar pezh fall
Ne c'houlenne nemed fringal,
Goude 'n ofern beteg an noz
An dans a oa e baradoz.

6

En iliz, en ofis divin,
Ne rea nemed komz ha c'hoarzin,
Ha trei e fenn skanv da zellet
A gleiz, a ziou, ouz ar wazed.

7

Biskoaz ne glevas a galon
Nag an ofern, nag ar zarmon;
Hag e leac'h mont d'ar gousperou,
Atao ez ea d'an ebatou.

8

Ouspenn ez ea d'an nozveziou
Skolioù fall an diaoulou,
Hep aotreadur e mestrez, —
Re zempl e kenver e mitez.

9

Eno e teske kant pec'hed,
Offansi Doue, plijout d'ar bed;
O vont, o tont, an noz tental,
Komzou lubrik, oberou fall.

10

Skuiz eo Doue ouz he gwelet
O rên eur vuez ken saotret;
Donjer bras en doa out-hi;
Ne c'helle mui he anduri!

11

Neuze e sko gant eur c'hlenvet
An danvad a oa dianket,
Evit hen lakat da zistrei,
Rak c'hoant en doa d'he fardoni.

Kendalc'h er miz kenta

An histor-ma, tennet euz eul leor great gant an Tad Delrio, a zo gwirion, hag a zo bet c'hoarvezet e bro Indez sao-heol, e kear Itara er blavez 1560.